

94

D'ar Autrou ar Prinç a Joinvil,
 ha d'ar Troñ ar Brinces imperial Francosa - Carolin a Vraganç, e bried. (4, suite)

Eur c'hêlou a glevân, am rent meurbet laouen :
 Ho tistro, ô va Frinç ! en Franc a zo certen !...

Pegement e carfen ellout disquez amân
 Ar joa bur ha ger douç pekini a zantân !
 Rentet oc'h eta demp, mab caret hon Roue !...
 Erru oc'h en hor c'kreiz, dre ar c'hrag a Loue !
 Goude beza redet dre ar moriou a bell,
 Hon eus an esperanç e vo en Breiz - Uzel,
 Er c'henta pors - môr Franc e zit d'en em renta :
 Brestis a vo eirus d'ho quelet da quenta.

(5)

Bezomp carquet a joa, ô pobl demeus a Franc !
 Eru eo gant ar Prinç Francosa a Vraganç ;
 Princes eus ar Bresil a zo bet eureujet
 D'ar Prinç eus a Joinvil, Mab hon Roue caret.
 Doue, oc'h accordi feb caer donerzonou
 D'ar Brinces, dign da rên var an oll galonou,
 En deveuz felvezet, dre e vras madelez,
 Douçât an angen vras d'un tad ha d'ur vam quez.
 Oh ! priejou yaouanç ! redit... redit buan,...

Redit varzu Paris, da lemel eus a boan
 Hon Roue, ho tad mad, ho Mam, hon Rouanes,
 A verv dre garantez, gant teneridiguez,
 Da gaout o bugala stardet var o feultrin,
 Ha d'o renta laouen e creiz o oll chagrin.

A guerer troñ Doue, ô Prinç gement geuziet
 Gant an oll Francisien o deveus da garet,
 Ped an Autrou Doue da zont da veniga
 An union ger ezer eus an daou bried - mâ !
 Reget ur Prinç a voe ger mad hed e vue,
 A vez o exaucet gant madelez Doue.

(6)

Pa bartijot, va Frinç, évit hoc'h hir beach,

E credis rentà dèc'h a galon va komach,
 Ha var ar moriou pell ho poe ar vadelez
 D'am rentà peurgarguet demeus a levenez,
 O tont d'am enori dre ul lizer touchant,
 A verq e zoac'h bet eus va komach contant.
 Plijet hirio, va Frinç, permeti d'eur Breton
 Dont d'ho trugarecat eus a greiz e galon,
 Ha da bedi bepret ar c'hrouer souveren,
 Ha vo hoc'h union eurus da vivvigen.

Eur joa eus ar vrassa a zantan bars em c'heiz,
 O sonjal ne vin get an diverza en Breiz
 O tont da offr d'am Prinç ha d'ar Brinces caret,
 Va komach] a galon gant ar brassa respet.
 Na pequemant e ven contant hac eurus,
 Ha plich dèc'h va komach, ô Prinç carantezus!!!....

20 even 1843. A. Lédan.

(Vol. VII, p. 4-6.)